




*Ar c'helenn divyezhek evit ho pugel*

**KREGIÑ GANT AR VUHEZ DIOUZH AR GWELLAÑ**

*Offrez à votre enfant le meilleur départ possible dans la vie*

**CHOISISSEZ L'ENSEIGNEMENT BILINGUE**





**P**ouezus-tre eo an dibaboù a rit a-fet deskadurezh evit dazont ho pugel. Pa vo deuet ar poent da lakaat anezhañ er skol pe er vagouri e talc'hot kont eus meur a zezverk, sur a-walc'h, met an hini a lakaio ac'hanoc'h d'ober ho soñj a vo marteze ar yezhoù implijet eno.

Diskouez a ra ar blaketenn-mañ peseurt splet zo d'an deskadurezh divyezhek evit ar vugale, evit ho pugel deoc'h-c'hwi marteze.

Evel-just, ma fell deoc'h gouzout hiroc'h diwar-benn tra pe dra e c'hallot kaout respontoù a-berzh aozadurioù niverus. Evit se e c'hallot lenn ar rubrikenn "An darempredoù talvoudus" e fin ar blaketenn-mañ.

**L**es choix que vous allez faire concernant l'éducation de votre enfant sont des choix importants pour son avenir. Lors de son inscription à la crèche ou à l'école, vous tiendrez sûrement compte de nombreux facteurs mais l'un des critères qui sera peut-être décisif sera celui des langues utilisées dans ces établissements.

Cette plaquette vous montrera l'avantage que constitue l'enseignement bilingue pour un enfant, qui peut être le vôtre. Bien évidemment, si vous souhaitez des informations complémentaires, de nombreux organismes compétents pourront vous répondre. Pour cela, vous pouvez consulter la rubrique "Les contacts utiles" à la fin de cette plaquette.

**Peseurt splet d'an divyezhezh ?**

**Quels sont les avantages d'être bilingue ?**

3

**Deskiñ brezhoneg er skol**

**Apprendre le breton à l'école**

5

**Foar ar Goulennoù**

**Foire aux Questions**

6

**An darempredoù talvoudus**

**Les contacts utiles**

12



# Peseurt splet d'an divyezhegezh ? Quels sont les avantages d'être bilingue ?



*“E Frañs eo bet diskouezet eo ar re a oar galleg hag ur yezh rannvroel a zo ar re wellañ en eil derez pa vez anv a zeskiñ yezhoù estren”.*

> Jean Petit, bredyezhoñiour

*“En France, il a été établi que ce sont les sujets bilingues français / langue régionale qui obtiennent dans le second degré les meilleurs résultats dans l'étude des langues étrangères”.*

> Jean Petit, psycholinguiste

## 1 Kelenn

Setu amañ ar pezh zo bet lakaet war wel gant an enklaskoù. Ar vugale zivyezhek a zo :

- tuet o spred gant ar c'hrouiñ,
- dihunetoc'h o spred war tachennoù all da bevar ha pemp bloaz > kel. Ellen Bialystok, York University, Kanada,
- ampartoc'h da zerc'hel o barregezhioù spred pa vezont erru kozh > kel. Ellen Bialystok.



*«Enklaskoù zo bet graet e meur a vro ha diskouez a reont eo gwelloc'h disoc'hoù ar vugale zivyezhek d'an amprouadennoù QI hag ivez d'ar priziadennoù war ar c'hrouiñ.*

*Gwelloc'h eo ivez disoc'hoù ar vugale zivyezhek eget re ar vugale unyezhek evit a sell an amprouadennoù prederiañ skiantel hag ar poelladennoù matematik.”*

> kel. Colin Baker, prizachour etrebroadel war ar c'helenn divyezhek.

## 1 Enseignement

Différentes enquêtes ont montré que les enfants bilingues possèdent :

- une pensée plus créative,
- des compétences intellectuelles en avance dans divers domaines à l'âge de quatre et cinq ans > Pr. Ellen Bialystok, York University, Canada,
- une plus grande capacité à conserver leurs compétences mentales à un âge avancé > Pr. Ellen Bialystok.



*«Les études effectuées dans différents pays montrent que les enfants bilingues ont de meilleurs résultats aux tests de QI. Les évaluations concernant leurs capacités à créer sont également meilleures.*

*De même, comparativement aux enfants monolingues, les bilingues sont meilleurs en ce qui concerne les tests de réflexion scientifique et dans la résolution de problèmes mathématiques.”*

> Pr. Colin Baker, expert international en éducation bilingue.

## Disoc'hoù er skol

- Mat-tre eo disoc'hoù ar vugale enskrivet en hentadoù divyezhek.
- Da skouer, ken uhel hag el liseoù gwellañ eus Akademiezhioù Roazhon ha Naoned eo dregantad al liseidi a dap ar vachelouriezh pa'z int bet en un hentad divyezhek : **etre 95 ha 100% a dud a ra berzh.**

## Résultats scolaires

- Les résultats des enfants inscrits dans les filières bilingues sont excellents.
- A titre d'exemple, le pourcentage de réussite au baccalauréat des lycéens ayant suivi une scolarité bilingue est chaque année parmi les meilleurs des académies de Rennes et Nantes avec un **taux de réussite allant de 95 à 100 %.**





## 2 Buhez vicherel

Pa vezer brezhoneger ha galleg e c'heller mont war ar renk evit ur bern postoù-labour, a ya atav o niver war greskiñ. Bez' ez eus dija en-tu all da 1000 post-labour a ranker bezañ brezhoneger evit mont warno (enklask gant Arsellva Ofis ar Brezhoneg ; 2006). Gant ar steuñv politikerezh yezh a oa bet votet a-unvouezh gant Kuzul-rannvro Breizh e dibenn 2004 e tlefe bezañ un hanter muioc'h a vugale er skolioù a-benn 2010 ha dre-se e vo un hanter muioc'h a bostoù kelennerien divyezhek. En tu-hont d'ar c'helenn, e sell ar politikerezh yezh ouzh micherioù all. Niverusoc'h-niverus eo ar micherioù ma ranker gouzout brezhoneg ha galleg : an touristerezh, ar mediaoù, ar yec'hed, ar melestradur foran tiriadel, ar gwerzhañ hag ar bevaat... Evit echuiñ e kemer perzh ar c'humunioù el lusk-se ivez. Muioc'h-mui a diez-kêr, sinet ganto ar garta "Ya d'ar brezhoneg" kinniget gant Ofis ar brezhoneg, a grog da gas ur politikerezh yezh war-raok hag ezhomm o devez da gaout implijidi zivyezhek varrek evit se.

## 2 Vie professionnelle

La double compétence français-breton permet de postuler à un nombre d'emplois toujours croissant. Il existe en effet d'ores et déjà plus de 1000 emplois directs nécessitant la maîtrise du breton dans le cadre professionnel (enquête de l'Observatoire de l'Office de la Langue Bretonne ; 2006). De plus, comme le plan de politique linguistique voté à l'unanimité par le Conseil régional fin 2004 vise à doubler le nombre d'enfants scolarisés dans les écoles bilingues d'ici à 2010, le nombre d'enseignants bilingues devra lui aussi suivre cette forte croissance. Au delà de l'enseignement, la politique linguistique régionale concerne d'autres métiers. Les domaines où la maîtrise du breton et du français est un atout se multiplient : tourisme, médias, santé, fonction publique territoriale, vente, animation... Enfin, cet élan régional est relayé par les communes. Dans le cadre de la charte "Ya d'ar brezhoneg (Oui au breton)" proposée par l'Office de la Langue Bretonne, les mairies sont de plus en plus nombreuses à se doter d'une politique linguistique pour lesquelles elles ont besoin de personnels bilingues compétents.



## 3 Buhez sokial

**Ar vugale zo gouest da gomz div yezh a c'hell :**

- kaout darempredoù gant un niver brasoc'h a dud ha dre-se e vo pinvidikoc'h o buhez sokial,
- sevel ur pont etre rummadoù disheñvel pa vez brezhonegerien eus o zud-kozh pe eus tud all eus o familh. Talvoudus e vo evit an holl anezho,
- digeriñ o spered d'ur sevenadur all. Bezañ mestr war un eil yezh a roio tro d'ho pugel da zizoleiñ ur bed all, da geñveriañ doareoù disheñvel da welet an traoù gant o spered digor da zaou sevenadur.

## 3 Vie sociale

**Un enfant qui est capable de parler deux langues peut :**

- entrer en contact avec un plus grand nombre de personnes. De ce fait, sa vie sociale en sera enrichie,
- devenir un pont entre différentes générations si ses grands-parents ou d'autres membres de sa famille sont brittophones. Cette expérience sera particulièrement enrichissante pour chacun d'entre eux,
- s'ouvrir à une nouvelle culture. Maîtriser une seconde langue permettra à votre enfant de découvrir de nouveaux horizons, de comparer des manières de voir grâce à l'ouverture d'esprit que lui procureront ces deux cultures.




**A noter :** 60 à 75% de la population mondiale est bilingue. Seule une minorité de l'humanité est donc monolingue. Le monde d'aujourd'hui nécessite de tous des adaptations de plus en plus rapides. Confrontés au changement depuis l'enfance, les bilingues sont plus réactifs. Le plurilinguisme devient la règle et là encore les bilingues sont mieux armés pour acquérir d'autres langues que les monolingues.



**Da notennañ :**  
Etre 60 ha 75% eus an dud zo divyezhek er bed a-bezh. Ur bihanniver eo ar re na ouzont nemet ur yezh. Ret eo en em ober buanoc'h-buanañ diouzh ar bed hiziv an deiz. An dud divyezhek zo boas da cheñch yezh abaoe ma'z int bugale hag e-se e vez aesoc'h dezho ersaviñ buan. Hollbouezus eo deuet al liesyezhegezh da vezañ hiziv an deiz hag, aze c'hoazh, ez eo kalz aesoc'h d'an dud divyezhek deskiñ yezhoù all eget d'an dud unyezhek.

# Deskiñ brezhoneg er skol

## Apprendre le breton à l'école



Dre lakaat ho pugel en ur skol zivyezhek, hag eñ yaouankre, e vo graet ur prof eus ar gwellañ dezhañ. Kalz aesoc'h eo d'ar re vihanañ deskiñ ur yezh ouzhpenn eget d'an dud deuet pe d'ar vugale un tamm koshoc'h zoken hag ouzhpenn-se e vo kalz aesoc'h dezho deskiñ danvezioù all. Na zisoñjit ket e c'hell ho pugel deskiñ brezhoneg kerkent hag er skol-vamm. Evel-just e c'hell kenderc'hel ganti er skol gentañ-derez. En eil derez e vo tu dezhañ da genderc'hel da zeskiñ danvezioù all dre ar brezhoneg rak ar yezhoù n'int ket danvezioù studi hepken, binvioù deskiñ ez int ivez.

A-feur ma'z a ar vugale pelloc'h gant ar skol e vez gortozet gant o zud ez afent war-raok hag e vefe tapet barregezhioù nevez ganto. E-touez ar barregezhioù-se e vo ar brezhoneg hag ar galleg (diskouez a ra ar priziadennoù zo bet graet gant an Ensellerezhioù Akademiezh e oar kenkoulz galleg skolidi divyezhek ar CM2 hag ar re zo er skolioù unyezhek.) Bezit assur ho po roet, dre ar c'helenn divyezhek, un alc'hwez d'ho pugel evit mestroniañ an div yezh, ha meur a hini all c'hoazh.



«Boazioù deskiñ zo bet lakaet e plas evit deskiñ brezhoneg hag a servijo da zeskiñ saozneg. [...] Pa grego ar bugel divyezhek da zeskiñ saozneg da drede pe bevare yezh e tenno gounit, anat eo, eus an anaoudegezh en do dija (da nebeutañ) eus an div reizhiad fonetek, eus an div reizhiad yezhadur, eus an div reizhiad sevel ha deverañ gerioù h.a. Ur benveg efedusoc'h en do neuze, hag emren e vo evit tapout deskamant, ken e vo.»

> Ar priziadenn-se a oa bet kaset da benn er c'hlasoù divyezhek brezhoneg ha galleg diwar c'houlenn Dihun gant Gilbert Dalgalian ; yezhour, bet Renner ar Bedagogiezh en Alliance Française


Un enfant inscrit dans une école bilingue dès son plus jeune âge bénéficie d'un énorme avantage : plus on est jeune, plus l'apprentissage des langues se fait rapidement et plus cela sera fécond pour apprendre d'autres matières. Pour cela, sachez que votre enfant peut apprendre le breton dès son inscription en maternelle. Bien évidemment, il pourra ensuite poursuivre en élémentaire. Dans le second degré, il continuera à apprendre d'autres matières par le biais de la langue bretonne car dans un véritable système bilingue, les langues ne sont pas seulement des objets d'étude : elles sont des moyens d'apprentissage.

Au fur et à mesure que vos enfants avancent dans leur cursus scolaire, vous souhaitez bien évidemment, en tant que parents, les voir progresser et acquérir de nouvelles compétences. Parmi celles-ci figureront naturellement le breton et le français (les évaluations des Inspections Académiques ont montré que les enfants bilingues ont à l'issue du CM2 au minimum la même compétence en français que les enfants ayant suivi un cursus exclusivement en français). Vous pouvez être certain que grâce à l'enseignement bilingue, vous aurez donné à votre enfant la clé la plus sûre pour la maîtrise de ces deux langues, mais également bien d'autres encore...



*«Des habitudes d'apprentissage ont été mises en place en breton qui servent en anglais. [...] L'enfant bilingue abordera l'anglais en troisième ou quatrième position et son apprentissage bénéficiera alors, tout naturellement, du fait qu'il possède déjà (au moins) deux systèmes phonétiques, deux systèmes grammaticaux, deux systèmes de composition et de dérivation des mots, etc., donc d'un outil plus riche et d'une autonomie d'apprentissage incomparable.»*

> Evaluation réalisée dans les classes bilingues breton-français à l'initiative de Dihun par Gilbert Dalgalian ; linguiste, ancien Directeur Pédagogique de l'Alliance Française



# Foar ar goulennoù

## Foire aux questions



➤ **Ne gomzan ket brezhoneg : daoust hag un diaezamant eo evit lakaat ma bugel en ur skol zivyezhek ?**

N'eo ket ret deoc'h bezañ gouest da gomz brezhoneg evit gellout lakaat ho pugel en ur vagouri pe en ur skol zivyezhek. Ar braz eus ar vugale a zo er skolioù divyezhek n'eo ket brezhonegerien o zud e gwirionez. Aes eo d'ar vugale komz div yezh ha pa ne vefe komzet nemet ur yezh er gêr.

➤ **Penaos ober m'emaon o paouez dilojañ ha ma n'eo ket bet ma bugel nag en ur vagouri nag en ur skol zivyezhek peogwir e oamp o chom en ur gumun ma ne oa ket a gelenn divyezhek ?**

Er skol-vamm e vez tu atav da zegemer ho pugel, dre vras. Goude ar CP e c'hell bezañ un tamm startoc'h met mat e vo deoc'h mont e darempred gant skipailh ar sko-laerien. Ma vez mennet ar vugale pe ar familhoù e c'hal-ler adaptout an amzer gollet.

➤ **Je ne parle pas breton : est-ce que je peux quand même inscrire mon enfant dans un cursus bilingue ?**

Il n'est pas nécessaire d'être soi-même brittophone pour pouvoir inscrire son enfant en crèche ou en école bilingue. En réalité, aujourd'hui la très grande majorité des parents dont les enfants fréquentent les filières bilingues ne parlent pas breton. Les enfants deviennent facilement bilingues même si à la maison on ne parle qu'une langue.

➤ **Comment faire si je viens de déménager et que mon enfant n'est pas allé en crèche ou en école bilingue jusque là parce que nous habitons dans une commune qui ne disposait pas d'offre d'enseignement bilingue ?**

Dans les écoles maternelles, il est toujours possible d'inscrire votre enfant. Après le CP, cela peut être un peu plus difficile. Prenez le temps d'en parler avec l'équipe pédagogique, la motivation de l'enfant ou des familles est un élément important qui peut aider à rattraper le temps perdu.



Evit gouzout hiroc'h, emañ daveennoù Divskouarn er rubrikenn "An darempredoù talvoudus".

Pour de plus amples renseignements, vous trouverez les coordonnées de "Divskouarn" dans la rubrique "Les contacts utiles" à la fin de la plaquette.



> **Hentoù all zo evit lakaat ma bugel da zeskiñ brezhoneg er skol ?**

Kentelioù tañva d'ar brezhoneg a zo e skolioù kentañ-derez zo, dreist-holl e Penn-ar-Bed (evit kaout ur roll anezho, kit e darempred gant Ofis ar Brezhoneg). Peurliesañ e vez 1 eurvezh hanter bep sizhun, kaset gant un animatour evit deskiñ rimadelloù, kanaouennoù pe c'hoarioù e brezhoneg. Koulskoude, el live-se, n'heller ket kaozeal eus kelenn divyezhek.

> **Petra a c'hoarvezo gant ma bugel goude ar skol gentañ-derez divyezhek ?**

Kenderc'hel a ra an traoù en un doare naturel etre ar c'hentañ-derez hag an eil-derez divyezhek. Barrekaat a ra ar vugale evit kaozeal ha skrivañ.



Adalek an eil-derez e c'heller lavaret eo desket da viken an traoù bet tapet ganto er c'hentañ-derez. Deskiñ don danvezioù all gant un eil-yezh a ro tu d'ar vugale da gaozeal ha da skrivañ aesoc'h.

Degadoù a skolaioù a ginnig un deskadurezh divyezhek brezhoneg-galleg. Gant ar steuñv politikerezh yezh bet votet gant ar rannvo e tlefe niver ar vugale skoliataet en hentadoù divyezhek tremen eus 11.000 da 20.000 a-benn 2010.

> **Penaos ober m'emaon o paouez dilojañ ha ma n'eo ket bet ma bugel nag en ur vagouri nag en ur skol zivyezhek peogwir e oamp o chom en ur gumun ma ne oa ket a gelenn divyezhek ?**

Er skol-vamm e vez tu atav da zegemer ho pugel, dre vras. Goude ar CP e c'hell bezañ startoc'h, er skolioù Diwan dreist-holl, met mat e vo deoc'h mont e darempred gant skipailh ar skolaerien. Ma vez mennet ar vugale pe ar familhoù e c'haller adaptapout an amzer gollet.

> **Existe-t-il d'autres façons pour que mon enfant apprenne le breton à l'école ?**

Des modules d'initiation à la langue bretonne existent en écoles primaires, essentiellement en Finistère (pour avoir la liste complète des établissements concernés, entrez en contact avec l'Office de la Langue Bretonne). Cette initiation est le plus souvent délivrée sous forme d'une heure et demie par semaine au travers de comptines, chansons et autres jeux proposés par un animateur. Cependant, on ne peut parler d'éducation bilingue à ce niveau.

> **Que se passe-t-il après le primaire bilingue ?**

La continuité se fait naturellement entre le primaire et le secondaire bilingue. Les capacités d'expression des enfants s'enrichissent considérablement. C'est à partir du secondaire que les bases acquises au primaire sont vraiment assimilées pour tout le restant de la vie. L'enseignement approfondi d'autres matières par le biais d'une deuxième langue ouvre aux enfants les portes d'une expression plus variée. Plusieurs dizaines de collèges dispensent un enseignement bilingue breton-français. Grâce au plan de politique linguistique voté par la région, le nombre d'enfants scolarisés dans les filières bilingues devrait passer de 11.000 à 20.000 d'ici à 2010.

> **Comment faire si je viens de déménager et que mon enfant n'est pas allé en crèche ou en école bilingue jusque là parce que nous habitons dans une commune qui ne disposait pas d'offre d'enseignement bilingue ?**

Dans les écoles maternelles, il est toujours possible d'inscrire votre enfant. Après le CP, cela peut être plus difficile notamment dans les écoles Diwan. Prenez le temps d'en parler avec l'équipe pédagogique, la motivation de l'enfant ou des familles est un élément important qui peut aider à rattraper le temps perdu.




**Mat da c'houzout :** skoazellet e viot evit dibab levrioù a-feson gant ho levrer pe gant kelenner(-ez) ho pugel.



**Bon à savoir !**

Pour trouver les livres les plus adaptés à votre situation familiale et à l'âge de votre enfant, demandez conseil à votre libraire ou à l'enseignant(-e) de votre enfant.





# Foar ar goulennoù

## Foire aux questions



### > *Penaos ober evit ma tenno gounid ma bugel eus an divyezhegezh ?*

**A-bouez-kenañ eo harpañ ho pugel er gêr.**

**Ma ouzoc'h brezhoneg e c'hellot :**

- lenn gant ho pugel ha selaou anezhañ o lenn,
- komz gantañ diwar-benn danvezioù a bep seurt - ur sikour evit deskiñ gerioù nevez e vo dezhañ,
- diskouez oc'h dedennet gant al labour-skol en deus d'ober er gêr, kinnig sikour ma vez ret met hep ober e labour en e lec'h , evel-just !

**Ma n'ouzoc'h ket brezhoneg, na vezit ket chalet. Mod pe vod e c'hellot sikour dre :**

- lenn levrioù divyezhek - an destenn c'hallek a roio an tu deoc'h da gompren an istor,
- na chomit ket etre daou soñj, lennit levrioù eeun e brezhoneg. Plijout a ray d'ho pugel reiñ sikour deoc'h da zeskiñ lenn e brezhoneg ! Bez' ez eus levrioù ivez gant ur c'hasedig da-heul. Un tamm skoazell e c'hallont bezañ ivez,
- dalc'hit soñj e plij d'ar vugale kaozeal diwar-benn ar skeudennoù a welont amañ hag ahont el levrioù ; kit gant ar yezh emao'h an aesañ ganti,
- alies e vez displeget al labour-skol zo d'ober en div yezh. Lezit ho pugel da zisplegañ deoc'h ar pezh zo skrivet e brezhoneg. Un dra dalvoudekaus e vo evitañ.

### > *Ha re ziwezhat eo din evit deskiñ brezhoneg ?*

Ne vo morse re ziwezhat, na deoc'h, na d'ho pried. Deskiñ e-keit m'emañ ho pugel o teskiñ a roio kalon deoc'h ha plijadur ho po asambles ! Kentelioù ha stummadurioù evit an dud deuet a zo e tost 200 kumun : ne vo ket diaes deoc'h tamm ebet kavout ur stummadur a vo diouzh ho live. Mat eo gouzout ez eus lod anezho a ginnig stummadurioù a-ratozh evit an dud zo o bugale er skolioù divyezhek.

### > *Comment faire pour que mon enfant puisse tirer tout le profit du bilinguisme ?*

**Il est surtout important que vous lui apportiez votre soutien à la maison.**

**Si vous parlez breton, vous pourrez :**

- lire avec votre enfant et l'écouter lire,
- parler de sujets aussi divers les uns que les autres - son vocabulaire s'enrichira d'autant,
- montrer tout votre intérêt pour le travail qu'il a à faire à la maison. Proposez-lui votre aide si nécessaire, sans prendre sa place bien évidemment !

**Si vous ne parlez pas breton, ne vous inquiétez pas. Vous pourrez quand même l'aider en :**

- utilisant des livres bilingues - le texte en français vous permettra de situer l'histoire,
- n'hésitez pas à prendre des livres simples en langue bretonne. Votre enfant sera très content de vous aider à apprendre à lire en breton ! Il existe également des livres accompagnés d'une cassette, cela peut constituer une aide intéressante,
- n'oubliez pas que les enfants adorent parler des images qu'ils voient au fil des pages ; aidez-les dans la langue qui vous met le plus à l'aise,
- bien souvent, les instructions pour les devoirs à faire à la maison sont bilingues. Laissez votre enfant vous expliquer ce qu'il a à faire à partir de ces quelques phrases - c'est toujours valorisant pour lui.

### > *Et moi, est-ce qu'il n'est pas trop tard pour que je m'y mette ?*

Il n'est jamais trop tard, ni pour vous, ni pour votre conjoint. Apprendre en même temps que votre enfant renforcera votre envie d'aller de l'avant et vous verrez que vous aurez tous du plaisir à avancer ensemble ! Il existe des cours et des formations dans près de 200 communes, vous n'aurez donc aucun souci à trouver la formation qui vous convient. Sachez également que parmi les différents organismes qui vous aideront dans votre apprentissage, certains proposent des cursus spécialement adaptés aux parents d'enfants inscrits dans les écoles bilingues.



Pellgomzit da zDeskiñ d'an Oadourien pe pell-gargit roll klok ar stummadurioù war lec'hienn Ofis ar Brezhoneg (**sellit ouzh an Darempredoù talvoudus e dibenn ar blaketenn**).

Appelez Deskiñ d'an Oadourien ("Apprendre aux adultes") ou téléchargez la liste des organismes formateurs sur le site de l'Office de la Langue Bretonne (**voir les Contacts utiles à la fin de cette plaquette**).



➤ ***Klevet a ran komz alies eus Diwan, Div Yezh ha Dihun : peseurt diforc'h a zo ?***

E 1977 e oa bet krouet ar skolioù Diwan kentañ. Ur rouedad skolioù divyezhek kevredigezhel eo, a ya eus ar skol-vamm d'ar c'hlas termen. Diouzh programoù an Deskadurezh Stad ez eont met yezh ar skol eo ar brezhoneg, evit kas ar c'hentelioù (e brezhoneg e tesker al lenn enta) hag evit buhez ar skol dre vras ivez. Skolioù dre soubidigezh int ; savet int bet diwar skouer ar skolioù gallek a ya en-dro evel-se e Kebek. Gant an doare kelenn-se e c'heller krouiñ un endro vat evit implijout ar yezh er-maez eus ar c'hentelioù. Evel-se e c'heller kempouezañ nerzh ar galleg er-maez eus ar skol, hag er gêr alies.

Abaoe 1982 e kinnig an Deskadurezh-Stad klasoù divyezhek ivez. Ar gevredigezh "Div Yezh" a vod tud ar vugale a fell dezho reiñ ur seurt deskadurezh d'o bugale ha krouiñ klasoù evel se. Eno ez eo ar brezhoneg yezh ar c'helenn evit un hanter eus an amzer, e mod all eo ar galleg. An deskiñ lenn a vez kaset war-raok en div yezh keñver-ha-keñver.

E 1990 e oa bet krouet ar c'hlasoù divyezhek kentañ en deskadurezh katolik (Dihun). Ouzhpenn ar brezhoneg hag ar galleg e vez kelennet saozneg adalek dibenn ar skol-vamm e-barzh ar "Steuñv Liesyezhek Brezhoneg" (ur pevare yezh a vez desket adalek ar 4<sup>e</sup> klas).

Diskouez a ra ar priziadennoù kaset da benn e dibenn ar CM2 gant an Ensellerezh-Stad eo ken barrek war ar galleg ar vugale divyezhek hag ar re unyezhek.

➤ ***Jentends souvent parler de Diwan, Div Yezh et Dihun : quelles sont les différences ?***


Les écoles Diwan ("Le germe") fonctionnent depuis 1977. Il s'agit d'un réseau d'écoles associatives bilingues qui proposent un cursus complet de la maternelle à la terminale. Les programmes sont ceux de l'Education Nationale. Pionnières en Bretagne en matière de bilinguisme, les écoles Diwan utilisent la pédagogie de l'immersion mise au point par les écoles françaises du Québec. Cette pédagogie permet de créer un environnement favorable à l'expression naturelle de la langue en dehors des cours. Elle permet ainsi de contrebalancer la forte présence du français en dehors de l'école et souvent à la maison.

Depuis 1982, l'Education Nationale propose également des classes bilingues. L'association "Div Yezh" ("Deux langues") regroupe les parents de l'enseignement public qui désirent offrir un enseignement bilingue à leurs enfants. Les cours sont dispensés en breton et en français selon le principe de la parité horaire. L'apprentissage de la lecture y est développé de manière parallèle dans les deux langues.

Depuis 1990, les écoles catholiques proposent également des classes bilingues (Dihun). En plus du breton et du français, l'anglais est introduit dès la moyenne section dans le cadre du "Plan Multilingue Breton" (avec introduction d'une quatrième langue dès la classe de 4<sup>e</sup>).

Les évaluations pratiquées en fin de CM2 par les Inspections Académiques ont permis de montrer que les enfants scolarisés dans ces trois filières avaient le même niveau de français que les enfants des écoles monolingues.





# Foar ar goulennoù

## Foire aux questions



### > Perak deskiñ brezhoneg kentoc'h eget saozneg ?

Da gentañ, peogwir emañ e Breizh, peogwir ez eo ar brezhoneg ur yezh vray, hor glad dimp-holl, hag e rannomp ober diouzh ma vleunio c'hoazh dre dreuzkas anezhi d'ar rummadoù da zont.

Diskouezet o deus ar yezhoniourien ivez n'hall an divyezhegezh mont en-dro nemet ma vez gwriennet

e buhez ar vugale. Ret eo kregiñ gant ar yezhoù zo tomm d'ar galon. Ur wezh tapet ar boaz da dremen eus ur yezh d'eben e vo aesoc'h d'ar bugel deskiñ yezhoù all rak seul vui e anavezer yezhoù, seul aesoc'h eo deskiñ yezhoù nevez. Da skouer ez eo pinvidikoc'h reizhiad fonologel ar brezhoneg eget hini ar galleg. Gallout a raio ar vugale neuze deskiñ distagañ sonioù

n'eus ket anezho e galleg hag a vo adkavet ganto e yezhoù all evel an alamaneg, ar saozneg pe ar spagnoleg. Evit echuiñ, ned a ket ar "pep tra e saozneg" a-du gant al liesyezhegezh, zo ur binvidigezh en Europa ha dreist-holl e Frañs.

*"Deskiñ ur yezh rannvroel abred a vroudo ar vugale da zeskñ yezhoù estren all. Dre an hent-se e vo kaset ar vugale da vezañ Europiz warc'hoazh. [Er c'hontrol], ar saozneg, o vezañ m'eo ur yezh hollvedel brizhofisiel he statud ne ro ket c'hoant d'an dud da zeskñ yezhoù all"*

> Claude Hagège ; L'enfant aux 2 langues

### > Ha ne vo ket re ziaes da'm bugel mont gant 2 yezh ?

E-pad pell e Frañs ez eus bet klevet rakvarnioù a-enep al liesyezhegezh, ar pezh a zispleg an dale zo ganti war an dachenn-se e-keñver broioù all Europa. Unan eus ar re anavezetañ a oa soñjal e vefe distablaet ar vugale pa vefe lakaet ur yezh all dezho da zeskñ er skol ha pep tra a vefe mesket war-lerc'h. 30 bloavezh a skiant-prenet gant ar skolioù divyezhek e Breizh hag e lec'h all (Kebek, Kembre...) o deus prouet ar c'hontrol. En-tu all d'ar fedoù-se ez eus displegadennoù neurologel bremañ : n'eo ket stankañ ar spered a ra an divyezhegezh, distankañ anezhañ ne lavaran ket.

*"E penn ar vugale ez eus neuron a-vil-vern hag al liamm kenetrezo a vez graet aesoc'h eget e penn an dud deuet. An neuron na vint ket implijet e penn ur bugel a yelo da get : kenkoulz eo ober e vad eus barregezhioù an empenn kentoc'h eget lavaret e vefe revec'hiet."*

> Nathalie Richard, ortofonourez

### > Et pourquoi pas l'anglais plutôt que le breton ?

D'abord bien sûr parce que l'on est en Bretagne, que le breton est une belle langue, notre patrimoine collectif, et qu'il est de notre responsabilité d'agir pour qu'elle puisse continuer à s'épanouir en étant transmises aux générations futures.

Mais aussi parce que les linguistes ont démontré que le bilinguisme ne peut fonctionner que s'il s'enracine dans le vécu des enfants. Il faut partir des langues proches du cœur. Une fois acquis les réflexes de passage naturel d'une langue à l'autre, l'enfant pourra beaucoup plus facilement apprendre d'autres langues car plus l'on connaît de langues, plus il est possible d'en apprendre de nouvelles. Par exemple le système phonologique du breton est plus riche que celui du français. Les enfants pourront donc apprendre à prononcer en breton des sons qui n'existent pas en français et qu'ils vont retrouver dans d'autres langues comme l'allemand, l'anglais ou l'espagnol.

Enfin, le "tout anglais" ne va pas dans le sens du multilinguisme qui est une richesse en Europe et tout particulièrement en France.

*"L'apprentissage précoce d'une langue régionale incitera l'enfant à acquérir d'autres langues étrangères. Cet itinéraire conduira ces enfants multilingues à être les européens de demain. [Par contre], l'anglais, étant donné son statut officieux de langue universelle dissuade d'apprendre d'autres langues"*

> Claude Hagège ; L'enfant aux 2 langues

### > 2 langues pour mon enfant, ce n'est pas trop à son âge ?

De nombreux préjugés ont longtemps circulé en France à propos du multilinguisme ce qui explique un certain retard dans ce domaine comparé aux autres pays européens. L'un des plus répandus consistait à s'inquiéter pour l'enfant qui serait littéralement surchargé par la coexistence de deux langues dans son cerveau tant et si bien qu'à la fin, tout se mélangerait dans sa tête. En fait, 30 ans d'expérience de bilinguisme en Bretagne et ailleurs (Québec, pays de Galles...) ont prouvé que c'était exactement le contraire. Aujourd'hui, plus encore que ces expériences fructueuses, les progrès de la neurologie et de l'imagerie médicale démontrent que le bilinguisme précoce loin d'embrouiller les esprits favorise bien au contraire l'épanouissement.

*"Chez les jeunes enfants, il y a énormément de neurones et les connexions se font donc beaucoup plus facilement que chez l'adulte. Tous les neurones qui ne sont pas utilisés chez l'enfant finissent par disparaître. On a donc tout intérêt à exploiter les facultés du cerveau plutôt que de prétendre que ce serait une surcharge."*

> Nathalie Richard, ortophoniste



*"Ne vern pegoulz e vez desket ar saozneg evit un den divyezhek ha n'eo ket mui ar saozneg an "alc'hwez hollvedel" evel ma oa bet soñjet gant kalz a dud. An alc'hwez hollvedel nemetañ eo an deskadurezh liesyezhek, eleze kregiñ er vuhez gant div yezh."*


> Gilbert Dalgalian ; doktor war ar yezhoniezh

*"L'anglais pour un bilingue peut arriver dans n'importe quel rang et n'est plus l'universelle "clé anglaise" que beaucoup ont cru. La seule clé universelle est bel et bien l'éducation plurilingue, fondée sur un démarrage bilingue dans la vie."*

> Gilbert Dalgalian ; docteur en linguistique



Ar c'hinnig kelenn divyezhek er c'hentañ derez d'an distro-skol 08  
L'offre en enseignement bilingue dans le 1<sup>er</sup> degré à la rentrée scolaire 08



> **Ha gallout a raio ma bugel tremen  
d'ur c'hlas unyezhek war-lerc'h,  
diouzh an dro ?**


N'eus kudenn ebet dre ma'z eo programmoù an Deskadurezh-Stad a vez heuliet e pep lec'h hag ensellet e vez ar skolioù gant servijoù ar Rektorelezh evit bezañ sur eo ken barrek war ar galleg ar vugale zivyezhek hag ar re a zo en hentadoù unyezhek. Ar pezh zo, kollet e vo splot an divyezhegezh, aze emañ ar gudenn nemeti. Neuze, ma tilojit ha ma n'eus skol zivyezhek ebet en ho kêr nevez, goulennit ouzh ar pennadurezhioù a zere ma vo kinniget an divyezhegezh d'ho pugel en-dro !

> **Comment se fait la liaison entre  
l'enseignement bilingue et l'enseignement  
monolingue si mon enfant est amené  
à rejoindre le système monolingue par la suite ?**


Il n'y a pas de problèmes, les programmes d'enseignement des 3 filières bilingues sont ceux de l'Education Nationale. Les services du Rectorat veillent d'ailleurs scrupuleusement à ce que les enfants bilingues aient le même niveau en français que les enfants qui sont dans l'enseignement monolingue francophone. Le seul problème en vérité, c'est que votre enfant ne bénéficiera plus des atouts du bilinguisme. Alors, s'il vous arrive de déménager dans une ville non pourvue en offre bilingue, adressez-vous aux autorités compétentes pour que votre enfant puisse continuer à avoir la chance d'être bilingue !



Ar c'hinnig kelenn d'an dud deuet e 2008  
L'offre d'enseignement pour les adultes en 2008



Kresk ar skolioù divyezhek  
Le développement de l'enseignement bilingue



# An darempredoù talvoudus evit mont pelloc'h Les contacts utiles



## >> Titouroù hollek diwar-benn an divyezhegezh Renseignements divers sur le bilinguisme

### **Ofis ar Brezhoneg / Office de la Langue Bretonne**

10, straed Naonediz / 10, rue Nantaise  
35000 ROAZHON / RENNES  
02 23 44 04 33  
[studi.diorren@ofis-bzh.org](mailto:studi.diorren@ofis-bzh.org)  
[www.ofis-bzh.org](http://www.ofis-bzh.org)

## >> A-raok ar skol (magourioù, skoazellerezed-mamm...) Pré-scolaire (crèches, assistantes maternelles...)

### **Divskouarn**

Ti ar Vro - Bro Leon  
12, straed ar Marne / 12, rue de la Marne  
29260 LESNEVEN  
02 98 83 08 91  
[divskouarn403@orange.fr](mailto:divskouarn403@orange.fr)  
<http://divskouarn.blogspot.com/>

## >> Kelennadurezh divyezhek Enseignement bilingue

### **Diwan (skolioù kevredigezhel / écoles associatives)**

T.A. Sant-Ernel / Z.A. Sant-Ernel  
29411 LANDERNE / LANDERNEAU CEDEX  
02 98 21 33 69  
[diwan.breizh@wanadoo.fr](mailto:diwan.breizh@wanadoo.fr)  
[www.diwanbreizh.org](http://www.diwanbreizh.org)

### **Div Yezh (klasoù divyezhek an Deskadurezh-Stad / classes bilingues de l'Education Nationale)**

10, straed an Aotrou Gibert / 10, rue Abbé Gibert  
22110 ROSTRENEN / ROSTRENNEN  
02 96 29 23 33  
[div.yezh.breizh@wanadoo.fr](mailto:div.yezh.breizh@wanadoo.fr)  
[www.div-yezh.org](http://www.div-yezh.org)

### **Dihun (skolioù divyezhek katolik / classes bilingues catholiques)**

1, straed ar Vrogarourion / 1, rue des Patriotes  
56000 GWENED / VANNES  
02 97 63 43 64  
[dihun.breizh@freesbee.fr](mailto:dihun.breizh@freesbee.fr)  
[www.dihun.com](http://www.dihun.com)

### **Ho ti-kêr**

Goulennit ouzh servij kelenn ho ti-kêr pelec'h emañ ar  
skol zivyezhek tostañ d'ho ti.

### **Votre mairie**

Demandez aux services en charge de la vie scolaire  
quelles sont les écoles bilingues les plus proches de  
votre domicile.

## >> Kelenn d'an dud deuet Formation pour adultes

### **DAO**

Ti ar Vro - 6, plasenn Gwirioù Mab-den /  
6 place des Droits de l'Homme  
29270 KARAEZ-PLOUGËR / CARHAIX-PLOUGUER  
02 98 99 94 24  
[dao.breizh@wanadoo.fr](mailto:dao.breizh@wanadoo.fr)  
[www.dao-bzh.org](http://www.dao-bzh.org)

